

AR VUHEZ

ORGANE
MENSUEL

KRISTEN



Eur vro nevez hag eur bed nevez hon
eus da gempenn... Holl d'al labour!!!

LENNIT PIZ KEMENT-MAN

Priz ar gelaouenn :

Ar Vuhez Kristen hepken :

Koumanant ordinal : 15 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 ofereñ) :
20 lur

Kenteliou Sant Fransez hepken :

4 lur (c'houezek real)

Ar Vuhez Kristen ha Kenteliou S. Fransez

Koumanant ordinal : 19 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 ofereñ) :
20 lur

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »

Convent des Capucins

C.C. 209-81 Nantes

ROSCOFF (Finistère)

Taolenn ar Miz

Lennerien, Mignoned.....	p. 179
Kenteliou an Aviel.....	p. 180
Raiapen.....	p. 183
Al leor fall.....	p. 187
Dirak ar maro.....	p. 191
Deveriou ar c'hristen.....	p. 193
Pedenn d'ar Werc'hez.....	p. 195

6^{et} BLOAVEZ

DU 1940

N^o 11

ORGANE
MENSUEL

Ra vezo meulet Jezuz-Krist !... Bepred !



Kenteliou Sant Fransez

Kelaouenn an Drede-Urz

Priz evit eur bloaz : 4 francs

Ar c'houmanant a c'hell beza paeet e timbrjou. — An neb na fell ket d'ezan reseo mui ar gelaouenn a zo pedet da skriva war ar golo : *refusé*, ha da zigas anezi d'eomp en-dro dre ar post.

An holl liziri a dle beza kaset da : R.P. Eugène Le Quéau, Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère). — C./C. 291-62 Nantes.

E kreiz ar boan...

Va breudeur ha va c'hoarezed ker,

Anaout a rit holl ar pennad kaër-man eus an Aviel : eun dervez, Hor Salver, goude beza roët ar pare da zaou zen dall, a oa o tigouezout e kêr Jeriko, leun a balmez hag a roz ; e-touez an dud a oa ouz her c'hedal, e oa eur mestr-publikan hanvet Zache hag en doa c'hoant-bras gwelout Jezuz, ken brudet dre e zantelez hag e viraklou ; met o oeza ma oa bihan, e redas en a-raok hag e pignas war eur vezenn fiez evit beza uheloc'h.

Jezuz, en eur dremen, a savas e zaoulagad war ar wezenn hag a lavaras d'ezan :

« *Zache, deus buan en traon, rak me a fell d'in diskenn hirio e-barz da di.* »

Gwechall, ar mestr-soudard n'en em gave ket din da reseo Hor Salver en e di.

Hirio avat, Jezuz e-unan eo a fell d'ezan diskenn e ti eur publikan disprizet gant ar Farizianed orgouilhous.

Jezuz o tiskenn en e di?... pebez levez... pebez tra souezus evit Zache!... Met buan-buan e tiskenn diwar ar wezenn, ha leun a umilite hag a garantez;

« Aotrou, emezan, me a ro d'ar re baour an hanter eus va madou, ha m'am eus nozet ouz unan bennak, me a zo prest da rentia d'ezan peder gwech muioc'h. »

« Zache, a respontas d'ezan Jezuz, ar silvidigez a zo deut birio en ti-man. »

ooo

Va breudeur ha va c'hoarezed kêr, edon, breman 'z eus eun nebeudig dervezioù, o lenn ar pennad-se eus an Aviel, pa savas ar sonj-man em spered :

Jezuz, o tiskenn e ti Zache, a zigasas d'ezan ar silvidigez hag al levez, ha kement-se a ro d'eomp ivez, pa ziskenn en hon ene dre ar gomunion.

Met daoust ha Jezuz ne sko ket ivez, a-wechou, war dor hor c'halon... gant e groaz :

« Va mignon, a lavar-hen neuze, me a fell d'in diskenn birio e-barz da di; me am eus ezomm eus da skoazell evit dougen va c'broaz... ken pouner gant pec'hejou an dud... Evit be skañvaat, laka da boaniou gant va re... Ro d'in digemer, mall eo ganin diskenn e-barz da galon. Ni a c'houzanvo asamblez... evit savelei an eneo. Ha kontant out? »

ooo

Zache a lavaras da Jezuz e oa prest da rei d'ar beorien an hanter eus e vadou ha da zigoll ar re holl en doa nozet outo.

Ha ni, petra 'respontimp d'Hor Salver? Evit savetei an eneo, evit dasprena hor bro baour, daoust ha kavet e vefe en hon touez unan digalon bennak da nac'h outan ar pinijennou a c'houlenn diganeomp e-pad an amzer garo-man?

O! na chomomp ket da varc'hata; da Jezuz o kestel diganeomp eun tammik sikour, respontomp holl :

« Aotrou, m'am eus nozet ouz unan bennak — ha piou n'en deus ket nozet ouz heman pe hennez dre e skoueriou fall hag e bec'hejou enep ar garantez? — m'am eus nozet, kemerit ar pec'h a garoc'h; me a fell d'in gouzanvo ganeoc'h hag evidoc'h. »

Hag en desped d'hon daëlou ha d'hor poaniou a bep seurd, bezomp sur eus a gement-man :

O tont d'hor bizita gant e groaz, Jezuz a zigaso d'eomp ha d'hor bro, n'eo ket al levez marteze hervez ar bed, met da vihana ar peoc'h hag ar silvidigez.

Pedomp evel Sant Fransez

« Bubez Sant Fransez a voe holl eur vubez a bedenn », a lavar d'eomp Tomaz a Celano. Gouzout mat a rae e oa hi ret-mat evit kaout gras an Aotrou Doue ha n'helle seurd ebed hep ar gras-se evit silvidigez an eneo... Ha setu perak, n'eus forz petra' rae, e save da genta e spered war-du an Aotrou Doue dre ar bedenn da c'houlenn digantan e skoazell.

Da Zoue e komze evel d'eun Tad, ha da Jezuz evel d'eur mignon, hag e c'houlenne pardon evit ar bec'herien betek kaout e c'houlenn penn-da-benn.

Ken mat a pede ma teue a-benn da gaout miraklou, betek lakaat ar peoc'h etre ar vrezellerien hag ober d'an eneo distrei ouz Doue dre vilierou.

Da genta e pede gant eur galon izel, en eur lavarout evel ar Roue santel David : « Roit d'in va goulenn, Aotrou, me n'oun nemet eur paour hag eur reuzeudik ! » Sant Fransez a zo bet eur paour hervez an Aviel, distag mat e galon diouz pep tra, hag eun niver bras a dud en deus chachet d'e heul war hent ar baourentez. Penaos 'ta ne vije ket bet selaouet gant Doue, pa 'z eo merket er Skritur-Sakr : « An Aotrou Doue a selaou pedenn ar re baour. » ...Da c'houde, n'eo ket hepken war hent ar baourentez en deus kerzet, met ivez war hent ar groaz, dorn-ouzdorn gant Hor Salver, henvel-mik outan; penaos ne vije ket bet kavet mat e bedennou?

Greomp evel Sant Fransez : komzomp da Zoue evel d'eun Tad, da Jezuz evel d'eur mignon; bezomp izel a galon evel publikan an Aviel, ha distag hor c'halon diouz traou ar bed-man; kinnigomp da Zoue, evit tenna warnomp e vennoz, poaniou ha meritou hep muzul Pasion santel Hor Salver Jezuz-Krist.

Ha neuze, evel Sant Fransez ivez, na c'houlennomp ket evidomp hon-unan, met da genta evit gloar Doue ha mad an eneo. Klaskomp a-raok pep tra rouantelez Doue war ar bed-man, evel m'eo merket er « Batez », ha stagomp gant evez ha nerz-kalon d'e lakaat da ren en hor c'halon.

Neuze, met neuze hepken, henvel-rik ouz re hon Tad Sant Fransez, hor pedennou a vezo selaouet. An Aotrou Doue a roio d'eomp madou an Nenv... hag ar re-all war ar marc'had !

Deiz	GOUELIOU	Indulj.
1 G	AN HOLL SENT	A. J.
2 S	Gouel an Anaon ; bep bizil	I. V.
13 M	S. Didas	I. V.
14 Y	S. Jozafat	I. V.
16 S	Santez Agnes	I. V.
19 M	Santez Elizabed, patronez an Drede-Urz	I. V. A. J.
21 Y	Ar Werc'hez kinniget d'an Templ	A. J.
25 L	Santez Katal	A. J.
26 M	S. Leonard a Borz-Moriz	I. V.
28 Y	S. Jakez a Varoh	I. V.
29 G	Gouel Holl Sent Urz S. Fransez	I. V.
	O renevezi ar profesion	I. V.

Da zeiz ar vodadeg miziek ha tri dervez d'ho choaz : I.V.

HON OFERENN AR MIZ a vezo lavaret e kouent Rosko d'ar gwener kenta eus ar miz 1 Du. En eur lida gouel an Holl Sent, goulennomp digant ar Galon-Sakr ar c'hras da gerzout war o roudou, ha pedomp gant evez, gant nerz ha gant fizians evit hor Breudeur ha C'hoarezed eus an Drede-Urz eus Breiz-Izel aet dija dirak Doue.

HON ANAON. — *Kersent-Plabenneg*. — Marsellina Laot ; *Lannilis*. — Josefa Kalvarin. — *Gwitalmeze*. — An I. int. Le Brismagueur. — *Lannédern*. — M.-Yv. Béon.

TAOLIT EVEZ MAT!...

1° Priz « *Kenteliou Sant Fransez* » a vezo hiviziken 16 real (4 francs). Arabat d'eoç'h beza souezet gant kement-se, rak moula ar gelaouenn a goust d'eomp atao keroc'h-keras.

Roit d'eomp skoazell, ha, dreist-holl, bezit aketus da *baea ho koumanant*, pa vez deut ar poënt!

2° « *Ar Vuhez Kristen* » a zo adsavet. Lennit ha skignit anezi!

3° Muioc'h eget biskoaz eo ret *bizita ar Breuriezou*. Pedit a reomp ar re a zo en o fenn da skriva d'eomp pevare o defe c'hoant kaout ar vizit. Ni a raio hor possubl evit ober diouz o goulenn.

4° Hon Tadou a c'hell, n'eo ket hepken bizita ar Breuriezou, met ivez prezeg d'ezo *retrejou*. Skriva d'eomp ivez war ar poënt-se, ma vez ret.

Imprimerie L. BOCLÉ, Morlaix

Le Gérant : L. BOCLÉ.

Lennerien, Mignoned,

E pep lec'h hag a bep tu e veze goulennet diganeomp : peur e teuio adarre « Ar Vuhez Kristen » ?

Setu hi o tont...

Bloaz a zo, miz evit miz, eo chagnet da vont betek ho ti.

An niverenn diweza ho poa resevet a oa hini miz Here 1939, setu niverenn miz Du 1940 o tont betek ennoç'h. Grit digemer vat d'ez, embannit en-dro d'eoç'h eo dihonet hor c'helaouennig. Ret eo bet d'ez chom sioul epad ar brezel.

Kalz eus hor c'henlabourerien a zo bet soudard hag ar re a oa chomet er ger a oa kouezet re a labour warno.

Deuet eo en-dro an darn vrasa eus hor c'henlabourerien.

Unan anezo a zo prizoniet...

Eun all, siouaz, an aotrou Joseph Landuré, beleg yaouank eus Kernilis, a zo kouezet ha chomet war dachenn an emgann.

Lenn a reot pelloc'h eur pennad barzoniez savet gantan.

Eus tein e varadoz e roio nerz-kalon d'e vignoned chomet aman da stourm.

Dont a raio Ar Vuhez Kristen d'ho kwelet, bep miz, evelkent, mar plij gant Doue.

Ha ganti, e teuio evidoc'h kelennadurez Aviel santel Hor Salver Jezuz-Krist.

Ar Vuhez Kristen n'he deuz nemet eur goul hag eur pal : ober anaout ha karet Jezuz-Krist hag e Aviel.

Hirio, muioc'h eget biskoaz, eo mall bras staga a-zevri gant al labour-se, en eur vrb evel hon hini, breinet he c'halon d'ez gant krign-beo al « laïcisme », hadet e kement korn eus hor Breiz gant ar politikerezh fallakr, ar skoliou dizoue, ar c'helaouennou payan, ar gizioù nevez ampoezon enno.


Ober d'ar gristenien beva eur vuhez kristen gwirion, beza gwir gatoliked ha nann tammou kristenien, prest da vont da danva boued ampoezonet e kement rastell a vez lakæet d'ezo dindan ho fri... Deski d'ezo n'eus evit ar gristenien,

nemet eun hent, hini gourc'hemennou Doue ha re an Iliz ; nemet eur wirionez, an hini prezeget gant Jezuz-Krist ha gant e veleien ;

nemet eur gwir vuhez, an hini roet d'hon ene gant Jezuz-Krist o vervel war ar groaz ;

Setu aze hol labour.

Ra blij gant an Itron Varia ha gant Sant Fransez e venniga hag e lakaat da zougen frouez. « AR VUHEZ KRISTEN ».



Kenteliou an Aviel

Ar varn diweza da fin ar bed

P'edo Jezuz o vont er-maez eus an Templ, gant e ziskibien, unan anezo a lavaras d'Ezan :

« Mestr, na kaera templ ! Gwelit pebez mein ha pebez mansontez ! »

Jezuz a respontas dre ar c'homzou-man :

« Gwelout a rit ar mogerioù-se. E gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h, dont a raio eun amzer ma vezint dismantret holl, ken ne chomo mui anezo maen war vaen. »

Jezuz a yeas goude da azeza war venez an Olived. Eziskibien Per, Jakez ha Yann a dostaas outan hag a c'houlennas digantan :

« Mestr, lavarit d'eomp peur e tigouezo an traou-se ha penaos e ouezimp e vezo o tont ho rouantelez ha fin ar bed ? »

Hor Salver ne fellas ket d'ezan respont d'o holl c'houlennou. Ne gomzas d'ezo nemet eus dismantret Jeruzalem a dlee digouezout wardro daou-ugent vloaz diwezatoch, hag eus ar gwalleuriou spontus a dlee beza gwelet araok, e bro ar Jude.

Dismantret Jeruzalem a oa eur skeudenn eus dismantret an douar da fin ar bed, hag ar gwalleuriou a oa d'e heul eur skeudenn eus ar gwalleuriou, mantrusoc'h c'hoaz, a dle degouezout araok fin ar bed.

Dismantret ar ger santel a ro eta d'Hor Salver tro da zisplega d'e ziskibien lod eus ar merkou a ziskouezo d'an dud eman tost fin ar bed, ha da gomz d'ezo eus ar varn vras a vo neuze, goude ma vo savet an holl dud eus a varo da veo.

« Sevel a raio, eme Hor Salver, pobl enep pobl ha rouantelez enep rouantelez... Pa glevot komz a vrezel hag a zispac'h, arabat d'eoc'h sponta. An traou-se a c'hoarvezo met ne vezo ket c'hoaz ar fin... Bez' e vezo kren-douar, bosenn ha naonegez e meur a lec'h, hag en oabl arouezioù spontus ha burzudou bras : an dra-man ne vezo nemet ar pennkenta eus ar poaniou. Epad an amzer-se e vezo trubuilh bras evel n'eus bet hini ebet abaoe m'en deus Doue krouet ar bed, hag evel na vezo birviken. Ha ma ne vefe ket betraet an deizioù-se, n'helfe den ebet harpa. Sevel a raio ivez falz-profeted hag a zesevo kalz tud... Ober a raint burzudou bras ha traou ken souezus ma lakfent da goueza zoken ar re santela. »

« Dioustu goude an deizioù-se e vezo sinadou en heol, el loar hag er stered : an heol hag al loar a gollo o sklerijenn, ar stered a gouezo eus an oabl, hag an Nenv zoken a horjello. War an douar e vezo ar poblou er vrasa enkreiz gant trouz ar mor hag an tarzioù. An dud a zizec'ho gant ar spont o c'hortoz ar pezh a dle c'hoarvezout gant ar bed holl. »

« Neuze e vo gwelet o skedi en Nenv merk Mab an Den (Kroaz Hor Salver Jezuz-Krist) hag holl boblou an douar a welo Mab an Den (Hor Salver) o tont war goabr an Nenv, leun a c'halloud hag a c'hloar. Hag e tigaso e Elez, gant trompilhous skiltrus, da zastum an holl dud eus an eil penn d'ar bed d'egile. »

D'ar varn diweza e vezo galvet evels an holl dud. Araok komz eus ar varn-se, Hor Salver a c'houlenn digant e ziskibien teuler evez ha pedi, rak n'ouzont ket peur e tigouezo.

« Pa zeuio, emezan, Mab an Den en e c'hloar, an holl Elez en-dro d'Ezan, e azezo war e dron gloriüs. An holl boblou a vo bodet dirazan hag e tispartio an eil diouz egile, evel ma tisparti ar mesaer an denved diouz ar bouc'hed. Hag e lakaio an denved (ar re vad) en tu dehou d'ezan, hag ar bouc'hed (ar re fall pe ar bec'herien) en tu kleiz. »

« Neuze ar Roue (Jezuz e-unan, ar Barner) a lavaro d'ar re a vezo a-zehou : « Deuit, tud benniget gant va Zad, deuit d'ar rouantelez a zo bet pourchaset evidoc'h goude ma oa krouet ar bed ; rak me am eus bet naon hag hoc'h eus roet d'in da zebri, me am eus bet sec'het hag hoc'h eus roet d'in da eva ; n'em oa ti ebet hag hoc'h eus roet loj d'in ; en noaz e oan hag hoc'h eus va gwisket ; klanv, hag hoc'h deuit d'am gwelet ; er prizon hag oc'h deuit betek ennoun. »

Hag an dud santel a responto d'Ezan :

« Mestr, peur hon eus ni ho kwelet o kaout naon hag hon eus roet d'eoc'h da zebri, o kaout sec'het hag hon eus roet d'eoc'h da eva ? Peur hon eus ni ho kwelet hep ti hag hon eus ni ho tigemeret ; e noaz hag hon eus ni ho kwisket ? Peur hon eus ni ho kwelet klanv pe er prizon hag ez omp deuit d'no kwelout ? »

Hag ar Roue a responto d'ezo :

« E gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h, ken alies gwech m' hoc'h eus graet kement-se d'an distera eus va bugale, d'in-me va-unan eo hoc'h eus hen graet. »

Neuze e lavaro ivez d'ar re a vezo a-gleiz :

« It pell diouzin, tud milliget, it d'an tan peurbadus a zo bet c'houezet evit an diaoulou. Rak naon am eus bet ha n'hoc'h eus ket roet d'in da zebri, sec'het ha n'hoc'h eus ket roet d'in da eva ; n'em oa ti ebet ha n'hoc'h eus ket va lojet ; noaz e oan ha n'hoc'h eus ket va gwisket ; klanv hag er prizon ha n'oc'h ket deuit d'am gwelout. »

Hag int ivez a c'houlennou :

« Mestr, peur hon eus ni ho kwelet o kaout naon pe sec'het, hep ti, pe noaz, pe klanv, pe er prizon, ha n'hon eus ket ho sikouret ? »

Jezuz a responto d'ezo :

« E gwirionez, m'hel lavar d'eoc'h, ken alies gwech ma 'z oc'h chomet hep ober kement-se d'an distera eus va bugale, ez oc'h chomet hep hen ober d'in-me va unan. »

« Ha neuze, eme Jezuz en eur echui, ar re-man a yelo d'ar poaniou peurbadus hag ar re just d'ar vuhez a bado da viken. »

Setu penaos en deus komzet Jezuz eus amzeriou diweza hag eus dervez diweza ar bed. Kement en deus lavaret a zigouezo evel m'en deus hel lavaret : rak, emezan, « tremen a raio an Nenv hag an douar met va c'homzou-me ne dremenint ket ».

Komzou Jezuz a die lakaat daou sonj en hor spered.

Ar c'henta eo heman : E pe du e vezin-me, dervez ar varn diweza, en tu dehou pe en tu kleiz ? Ret eo d'in her gwelout diwar vremen. Ma vevan bepred evel eur c'hristen mat, e c'hellan kaout fizians da vervel e stad a c'hras ha da veza da fin ar bed en tu dehou d'Hor Salver ; rak ar setanz a gouezo war va ene kerkent hag ar maro, a vo ar memes hini d'ar varn vras ; ne vo kemm ebet etrezo nemet e vo disklameriel houman dirak ar bed holl, elec'h ne vo ket lavaret eben nemet da bep hini, dioustu war-lerc'h ar maro.

An eil sonj a die dont d'eomp o klevout Hor Salver eo penaos e vezimp barnet dreist pep tra diwar ar garantez e kenver an nesa. An hini n'en deus biskoaz diskouezet karantez ebet d'an nesa, a vezo, da zeiz ar varn diweza, milliget gant Jezuz ha silapet en tan a bado da vilken. An neb en devezo e garet e gwirionez — ha n'heller ket diskouez gwir garantez d'an nesa hep karout Doue — a vezo benniget hag a yelo d'ar baradoz.

Karomp eta hon nesa evel ma tle beza karet ; sikouromp anezan en e holl oberou, en eur sonjal penaos hervez komz Hor Salver, eo Jezuz e-unan eo a garomp hag a sikouromp en hor breudeur. Hag evelse, e vezimp sur, da fin ar bed, da vont en tu dehou d'ar memes Jezuz ha da nijal goude gantan d'an eürusted peurbadus.

Diouallit diouz ar filiped

Ar filiped a zo lapousedigou rous a ra peurvuia o neiz dindan an toennou, pe e toullou-moger an tiez hag ar c'hreier.

Lapousedigou lontek int...

Pa vez taolet d'ar yer eur vozad greun bennak war al leur, bezit dinec'h, ar filiped o devezo o lod.

E-touez lennerien *Ar Vuhez Kristen* ez eus ivez filiped.

Piou eo ar filiped-ze ?

An dud n'o deus biskoaz paecet koumanant ebet d'hor c'he-laouenn hag a lenn anezi koulskoude bep miz... prestat hirio gant heman ha warc'hoaz gant egile.

Ma teufe da veza stank e-touez hol lennerien orin ar filiped, ne vefe mui nemet daou pe dri goumananter e pep parrez, hag hep-dale ez afe hor stal da stalig.

Arabat d'eoc'h beza filiped, ha ma n'ho peus ket koumanantet c'hoaz d'Ar *Vuhez Kristen*, her grit buan, ha digasit d'eomp talvoudegez eul lur aman pe eun dousenn viou. N'eo ket kalz keroc'h ! Hastit buan, n'ho pezo ket keuz !

RAIAPEN

Raiapenn... Setu hano ar c'hloc'hig a vez, bep mintin, stir-linket gant hor c'hurust evit embann d'an dud fidel eman Hor Salver war-nez « *diskenn en hon touez* » eur wech all c'hoaz.

Hag ar c'hloc'hig-se en deus eun istor hag a dalv ar boan beza kontet...

Eur
payan
ne-
vez
kris-
te-
net



E Kunnam edon en dervez-se. An Tad Benedict (eun Tad Kapusin indian a anavezit dija, a gav d'in) hag eur relijius all a oa ganin... hag edomp o vont da gregi gant hol lein... O, eul lein ha ne oa ket eul lein-friko a oa... bezit dinec'h !

Ne oa da zebri nemet riz ha « kurry ». Ar « c'hurry » a zo eur boued n'eo ket anavezet e Breiz, na zoken en Europa. Graet e vez gant pep seurt spisou (*épices* e galleg) laket mesk-ha-mesk... Pebr, holen ha sezo (moutarde) a zo traoù dous d'ar staon e-kenver ar c'hurry.

Evit an dud lipous

Ledet e vez ar c'hurry war ar pladad riz evel ma vez ledet amann rous war ar yod-kerch evit e lakaat da ziskenn gwelloc'h.

Da zijuni e vez riz ha kurry; da verenn e vez riz ha kurry, ha da goan e vez adarre riz ha kurry... Met blas ar c'hurry ne vez ket bepred ar memes hini... rak ar c'heginer a laka e ijin evit e aoza e kant doare dishenvel... ha n'eo ket diaes, ken stank ma 'z eo ar spisou er vro-man.

Pa vez deiz-gouel, e-lec'h eur pladad kurry, ho pezh daou... tri ha pevar zoken, pa vez goueliou bras-bras.

Ma teu ho staon d'en em voaza ouz ar boued-se, ez oc'h eürusa den a zo war an douar... bemdez ho pezh friko... Met ma n'hell ket ho stomok en em glevet gant boued ken c'houero, neuze ho pezh tro da ober pinijenn, aliesoc'h eget m'ho pefe c'hoant.

Dirak eur pladad riz poazet en dour, hag eur pladad kurry melen e kichen, e teu atao d'in va imor val... nemet, diouz ar mintin, e vefe koulz ganen kaout eur banne kafe, ha pa vefe tarzet.

Pa zistroin d'ar gear ha pa rankin en em lakaat da zebri kig ha farz, yod-kerch, krampouez ha traoù evelse, e kav d'in n'hellin ket padoul, ken boazet oun ouz bevans ar vro-man.

Setu Martin o tont

Edomp o vont da voule'ha ar pikol pladad riz a oa dirazomp, pa zigouezas Martin e-kichen an nor.

Eun den eus ar re wella eo Martin. Nevez kristenet eo, ha lakaet en deus start en e benn derc'hel d'e feiz nevez daoust d'ar fallagriez a bep seurt a vez graet d'ezan gant e amezeien payan.

Ken alies ha bemdez e teu Martin da gonta d'eomp e drubuilhou...

A-wechou n'en devez mui a labour, nag eul liard toull en ti evit maga ar vreg hag ar vugale... Eun dervez all bennak eo bet laeret digantan e c'havrig gant eun amezog bennak hag a oar re vat e c'hell, hep aon ebet da veza kastizet, laerez ar paourkez kristenien.

N'eus forz petra a c'hoarvez gant Martin, an Tad eo a rank klevout da genta an abadenn, ha renka an traoù, ma 'z eo ret hen ober.

Met lenvaloc'h eget biskoaz e kavan hirio pean Martin. N'eo ket chomet, evel kustum, e toull an nor... Trumm eo deuet betek ar penn-uhela, hag en eun halanad en deus dibunet d'eomp e gudenn. Chê, pebez abadenn !!!

Ia, eun abadenn

Eun tammig douar en deus Martin. O, nebeudig a dra ! Ha war e damm douar ez eus eun templ.

Kerkent ha m'eo bet badezet, e amezeien payan o deus difennet outan mont da gerc'hat dour d'ar puns.

Petra d'ober neuze ?

Toulla eur puns nevez war e zouar, na petra 'ta. Met, evit ober eur puns, eo ret kaout mein ? Hag e-pelec'h o c'haout ? Kaer 'zo, n'hell ket yalc'h an Tad misioner herzel ouz holl dispignou e gristenien.

Aliet em boa Martin da freuza an templ a oa war e atant, hag en hent se en defe mein.

Epad meur a zervez ha meur a nozvez e chomas nec'het va den...

Eun templ a oa eno

Met hirio, mintin mat, setu m'eo kroget gant e labour.

O, ne oa ket eur seurt krogad. Ma 'z eus en Indez templou hag a zo paleziou eus ar re gaera, ez eus ivez re-all hag a zo paour ha dister; hag an hini a oa e park Martin a oa eus ar re zistera.

Eur bern mein dindan eur wezenn vras, brud d'ezha da veza eur wezenn sakr, ha war ar bern-mein skeudenn eur falz-doue bennak kizellet divalo en eur maen... setu petra oa an templ-se.

E-lec'h ma 'z eus eur skeudenn, ez eus ivez eun doue. Setu kredenn ar baganed. Ha dirak skeudenn an doue e ligasont profou, e lakont goulou hag e tibunont o fedennoù en eur lavaret: *Rama... Rama...* rak Rama eo mestr bras an holl doueou.

Kerkent ha ma oa kroget Martin da skei gant e bigell war ar vein, an holl a oa diredet d'ar park droug bras ganto gwelet eur seurt sakrilaj. Klask a rejont miret ouz Martin mont larkoc'h gant e labour, rak ma oa ar park d'ezan, an templ, a lavarent, a oa d'ezo.

A-holl-viskoaz e oant deuet eno da adori o doue, Aiapen e hano, ha Martin n'en doa gwir ebet da freuza templ an doue-se.

Met Martin, pennok evel pemp Breizad, daoust d'ar gounnar a oa en e amez-ien, ne ziskrege ket diouz e bigell; ha dindan fri lemm ar benveg, tamm ha tamm e teue ar bern mein d'an traoù...

Eur sarpant

A greiz pep kreiz setu eur sarpant o tifoucha a-douez ar vein hag o tec'hout buan da guzat doun e-mesk ar mein-benevez, diaez an templ.

En taol-man e stagas an holl da hegari. Er vro-man, ar sarpant a zo eun aneval sakr..., eun doue a zo o veva en e gorf, ha laza eur sarpant a zo ober eur sakrilaj spontus ha chacha war an torfetour droukrans an doue.

Ar sarpant dilojet gant pioch Martin n'helle beza nemet Aiapen, doue an templ, ha diouz e welout o tec'hout gant tiz da guzat e oa anat e oa bras e gounnar.

Ha va Martin koz, bet ken kalonek betek-hen evit derc'hel penn d'e amezeien pagan, a santas e galon o vont bihan hag a zeuas da veza nec'het-mar.

C'hoarzin a c'hellomp hag hoja hon diskoaz o klevet seurt istoriou, met, pa vezer bet savet e-kreiz paganed, ha pa vez bet maget ar spered, e-pad eur vuhez a-bez, gant sorc'heanou eus ar

seurt-se, n'eo kel ken aes-se ober fae hirio war ar pezh a greded ken start dec'h !

Nec'het-maro e chomas eta Martin hag e bigell a gouezas diouz e zourn. Petra d'ober ? Mont betek ti an Tad ha netra ken. Da di an Tad da genta poent e tired Martin koulz hag an holl gristenien all bep tro ma vezont nec'het...

Hag a wechou, kredit ac'hanoun, e vez ret kaout ouspenn daou wennegad pasianted evit selaou penn-da-benn o marvailhou n'o devez na penn na lost...

En eun alanad en doa Martin kontet d'eomp e abadenn.

Eur gwall abadenn kaer 'zo. Gwelloc'h e oa mont da welet war al lec'h...

E diou lonkadenn e lonkis c'hoaz diou loaiad riz... eun lamm lipat d'am loa (rak debri a ran gant eul loa, n'em eus ket gellet en em voaza da zebri gant va bizied, re goz e oan moarval p'oun en em laket war ar vicher)... ha yao en hent gant an Tad Benedict, pep a benn-baz ganeomp...

Met marteze e sonjit n'eus ket huan hano ganen diwar-benn va c'hloc'hig... Gwir eo!... Met gortozit, dont a raio a-benn ar wech-all.

(Da genderc'hel.)

TAD MARIE-URBAIN,
eus Lanarvily,
misioner kapusin.

EN HAN' DOUE, ME HO PED!

C'honi hag a lavar ez oc'h Breiziz...

C'honi hag a zo bet desket d'oc'h ar brezoneg war varlenn ho mamm...

Na gomzit ket galleg ouz ho pugale !

Ha pebez galleg !

Gaou a rit ouz Breiz, ouz ar brezoneg hag ouz ho pugale...



AL LEOR FALL

I

Touellet gantan en eun taol,
Evit diskuiza va spered,
Em eus digoret war va zaol
Eul levrig nevez prenet.
Ennan, en eur c'hoariellat,
Pluenn hedro ar skrivagner
N'ehan da louza, da c'hoapat
Kement a zo yac'h, glan ha kaer.

II

Marteze eo grêt diskempenn ;
Met trelli ' ra an daoulagad :
A-sav e choman, trist va fenn,
Hep gellout mui lenn eur pennad.
An dud gouiziek ' zo ebestel...
Sonjal a ran en dud yaouank :
Dirazan n'hellint ket herzel,
Gantan ez aint betek ar tank.

III

War meur a zaol e vo digoret,
Ha dindan meur a benn-wele
E c'hortozo beza lennet.
Bleuniou spontus al leoriou-se !
Ehana ' reer 'n o c'hichenn,
Met war o deliou kontammet
Ar wenanenn a gred diskenn,
En-dro d'he c'hestenn ne da ket.

J. L.

Savet eo bet ar pennadig-skrid-man gant an Aotrou Joseph Landuré, beleg yaouank a Gernilis, maro war dachenn ar brezel.
Tro hor bezo c'hoaz da gomz d'oc'h diwarbenn an Aotrou Landuré e pajennoù « Ar Vuhez Kristen ».

Sorc'hennou Yann Digredenn

Beo eo c'hoaz Yann Digredenn, ha furaet tamm n'eo ket... ; diskiantoc'h diskianta eo deuet da veza, ha ret e vezo adarre ober meur a hoja d'ezan.

Perak n'en deus ket an Aotrou Doue graet eur mirakl evit savetei hor bro ?

Setu ar pezh a glever war vuzelloù meur a zen.

Diouz o c'hlevet, e vefe bet ret d'an Aotrou Doue dont d'hor sikour dre eur burzud bennak ! Na pebez diskianterez !

Ya, diskiant eo tamall an Hini a zo ar Furnez hec'h-unan.

Bez' ez eus tud hag a vez prest bepred da damall Doue, pa ne da ket ar bed en-dro hervez o sonjou hag o youlou... Hervez an dud-se, Doue eta a rankfe beza graet eur mirakl evidomp.

Eur mirakl, va zud vat !

* * *

Daoust ha meritet hor boa eur mirakl ?

Sellit 'ta penaoz eo en em renet ar Franz, daoust d'ar grasou ha d'an aliou bet d'ezi digant Doue !

Dalc'hit sonj eus komzou ar Werc'hez, er Salette, ha neuze, e-lec'h tamall Doue, c'houi a skoio war boull ho kalon gant keuz ha glac'har.

« *N'hellan mui derc'hel war brec'h va Mab, a lavare ar Werc'hez en eur lenva, ret eo d'ezan skei war ho pro abalamour ma vez enni torret lezennou ar sul, abalamour ma vez blasfemet ha dilezet ar bedenn hag ar binijenn.* »

Tost da gant vloaz a zo, he deus ar Werc'hez roet d'eomp ar gentel-se... Nag a zarvoudou a zo kouezet warnomp abaoe. Ha koulskoude n'eo ket digoret o daoulagad gant an dud ; ...ne fell ket d'ezo kompren !...

Na pegen stank eo an dud a dorr lezenn ar sul, na pegen rouez ar re he heuilh penn-da-benn... !

Nag a leou-douet, a vlasfemou, er staliou-labour, er parkeier, en tiez zoken !...

Eman dilezet krenn, koulz lavaret, dreist-holl gant ar yaouan-kizou, ar bedenn har ar binijenn !...

Ha pebez buhez diroll renet gant darn a zo ! Zoken er parrezioù o deus ar brud da veza parrezioù kristen, na pegen rouez an dud o deus eur gwir spered kristen !...

Petra 'ta a ranko ober an Aotrou Doue evit hol lakaat da senti ouz e lezenn ?

Hon Tad Santel ar Pab Pie XI a lavare e kouezfe war hor bro darvoudou spontus ma kendalc'hfe da vont gant an hent m'he oa warnan.

Kendalc'het o deus an dud gant o fallagriez hag o dallentez...

Kouezet eo warnomp an darvoudou spontus a gomze anezo ar Pab santel, Doue e bardono.

Kouezet int, ha pegen kriz !

En hec'h amzerioù tenvala, hor bro n'eo bet biskoaz diskaret ha flastret evel m'eo diskaret ha flastret hirio.

Hag, eur wech c'hoaz, arabat tamall an Aotrou Doue.

* * *

Doue a ro skoazell d'ar re a c'houlenn skoazell digantan...

Hogen hini ebet eus pennoù bras hor bro n'en deus kredet turel ar Franz war he daoulin dirak Doue, evit goulenn pardon ha truez !

Pell ac'hano, ar maro a oa dija etre dent ar Franz, ha ne ziskroge ket ar Framansoned diouz o labour fallakr.

* * *

Doue a ro skoazell d'an neb a ra da genta kement a zo en e c'halloud : « *aide-toi et le Ciel t'aidera* », evel ma lavarer e gallek.

Aes eo kompren an dra-se. Ne lako ket an Aotrou Doue ar gwiniz da sevel e park ar c'houer na fell d'ezan nag arat nag hada.

Hogen hor bro n'he deus graet nemet chacha ar c'harr war he c'hein.

Gant ar mil milionou dastumet gantan evit difenn ar vro, ar gouarnamant, e-lec'h ober kirri-nij, peziou kanol hag armou all..., a larde « yalc'h du » (caisse noire) politikerien ar gostezenn a roe harp d'ezan.

Berraet e veze an amzer labour ha digoret hor staliou-labour da zivroidi, liou ar groug warno, paet evit trei da fall hor micherourien.

Ha piou a oa lakaet e penn hon armeou ? Kamaraded paotred ar gouarnamant, an darn vrasa anezo, ken dic'halloud ha divarrek egeto.

Ha pa voe galvet, evit kemeret plas ar c'hoz mistri-man, ar wazed ampart ha gouiziek bet lakaet betek-hen er stal-a-gostez, edod re ziwezat !

Met gwasoc'h c'hoaz a zo be graet... E kalz eus hor skoliou laik, e veze lakaet, dalc'het ha paeet mistri evit skarza diouz spered ar vugale kement kredenn ha kement lezenn a ro furnez d'an den : nerz-kalon evit an dever, doujans d'ar mistri, lealded en darempredou, karantez evit ar vro... ne oant evito nemet marvailhou goullou, ha buan int bet kaset da foar an diaoul gant teodou binimus ha mousc'hoarz flemmus eur bern mistri...

Diouz he frouez e vez barnet eur wezenn...

Kutuillet hon eus hirio, ha tanvet zoken frouez eun deskadurez dizoue roet tost da 40 bloaz a zo d'an darn vrasa eus bugale Franz.

Hag e kav d'eoc'h e oa ret d'an Aotrou Doue ober eur mirakl ?...

Ober eur mirakl evit lakaat frouez yac'h da sevel ouz eur wezenn vreïn ?

Ober eur mirakl evit eeuna ha kompeza hentchou kammet ha digompezet gant fallagriez an dud ?

Ober eur mirakl evit rei en eun taol gouiziegezh hag ampartiz da dud diouiziezh ha diampart dre o faot ?

Ober eur mirakl evit difenn eur vro na oa ket e stad d'en em zifenn dre he leziregezh hag he fallagriez ?

Ober eur mirakl evit rapari kement-all a zislealded, a c'hevier, a laeroni, a drubarderez... a fallagriez a bep seurt hag a bep liou, graet gant pep-unan ha gant ar vro a-bez ?

Sonjit e kement-se holl, ha ne damallot mui an Aotrou Doue !

HA GALLEG-SAOUT ADARRE...

— *Quelle heure qu'il est, Chob ?*

— *Ah ! je sais pas, mon oroloj il est restée debout... J'ai levé ses poids à lui, mais il ne fait que reculer... C'est un vieux oroloj...*

GWIRBATER.

DIRAK AR MARO



N'eus ket pell c'hoaz, ez oun bet e interamant eun den yaouank, marvet d'e dregont vloaz.

Aboe eun nebeud miziou, e oa bet taget gant ar c'hlenved-skevent ; met ne gave ket d'ezan, na da zen all ebet, e oa ken tost an termen.

Ha setu, eun abardaevez, en eun taol, e sailhas warnan an ankou. Amzer o devoe tud an ti da c'hervel an Aotrou Person, a gofesaas hag a nouennas ar c'hlanvour.

Eun eur goude ma oa ken trumm gwasoet e stad, heman a lakae, a galon vat, e ene etre daouarn e Grouer. Rak eur c'hristen mat e oa, ha leun a feiz.

Lakaet e voe é gorf e brasa kambr an ti, hag, e-pad eun dervez hanter, e teuas tud, niverus-tre, da deurel warnan dour benniget ha da zaoulina en e gichen.

Lod a yae betek e vamm baour, intanvez abaoe meur a vloaz, a chome, nöz-deiz koulz lavarout, tost d'ar gwele ma oa astennet warnan he mab, daoubleget holl en he mantell zu, hag a ouele sioul, en eur lavarout he chapeled.

Kalz ne raent nemet kemer he dorn, hep lavarout netra : ne gavent komz ebet gouest d'he frealzi en eur c'hanv ken poanius.

Lod a lavare : « *Me a bedo... evitan... hag evidoc'b.* » Ha ne voe, e gwirionez, nemet ar c'homzou-se hag a rae eun tammig vad d'he c'halon mantret.

Lod, siouaz! kristenien koulskoude war o meno, a gomze d'ezhi evel tud difeiz ha paganed. Traou eus an doare-man : « *Petra ' fell d'eo c'h? Peb-bini a rank mont kuit d'e dro ba d'e eur! Ho mab a zo aet a-raozomp, ni a yelo war e lerc'h!* »

Tud diskiant! Ne raent nemet digeri brasoc'h ar gouli en he c'halon!

Rak, pa goll an den unan eus ar re en deus evito karrantez vras, tad, mamm, pried, mab, merc'h, eur sonj hepken a c'hell rei d'ezan frealzidigez e kreiz e boan.

Ar sonj-man : « *An bini a zo marvet n'eo ket marvet boll : e ene a zo beo c'hoaz! Ha ni en em welo adarre, er bed all, er Baradoz!* »

* * *

Pebez anaoudegez vat a tleomp ni eta kaout evit Doue, en deus hol lakaet en eur relijion ha n'eus nemeti a c'hellomp enni, hep kaout aon da fazia, kredi e kavimp a-nevez, goude hon tremenvan, ar re a garemp war an douar-man hag a zo bet tennet diganeomp gant an Ankou.

Pebez frealz, d'ar re a zo en kanv, klevet ar pezh a gan an liz en interamant!

Epad ar servij : « *Me gred eo beo va Salver hag e savin d'an deiz diweza eus ar boultren bag e welin va Salver gant daoulagad va c'horf. E welout a rin va-unan, ha nann eun all; va daoulagad a baro warnan.* »

Er gentel, tennet eus lizer Sant Paol, e vez lennet pe ganet e-pad an oferenn : « *Va breudeur, ne fell ket d'eo c'h e cbomsec'h hep gouzout ar wirionez diwar-benn ar re varo, evit n'en em root ket d'an dristidigez evel ar re all, ar re n'o deus ket a esperanz. Ma kredomp eo maro Jezuz ha savet eus a-douez ar re varo, evel-se ar re a zo maro en e garantez a vo galvet en e gichen gant Doue... Da c'houde e vo hon tro d'eo c'h-ni, hag e vezimp atao gant Jezuz da-c'houde.* »

En Aviel, komzou Jezuz da Vartha diwar-benn he breur Lazar : « *Ho preur a resusito... Me eo ar resureksion bag ar vubez. An bini a gred ennoun, ha goude ma vefe marvet, a vev; hag an neb a vev hag a gred ennoun, ne varvo ket da-viken.* »

Er prefaz : « *Bubez ho servicherien, va Doue, n'eo nemet chanjet, n'eo ket kollet; ha p'eo kouezet an ti hor boa*

war an douar-man, e vez prebaret d'eo c'h en Nenv eun ti a bado da-viken. »

* * *

Evit ar re n'o deus ket a feiz, ar maro a zo eun darvoud spontus hag euzus, dreist-holl pa 'z a gantan eun den e-kreiz e yaouankiz hag e nerz.

Evit ar c'hristen, ar maro eo an nor digoret d'ezan da vont da di e Dad a zo en Nenv, e-lec'h ma kavo adarre, abred pe ziwezat, ar re en deus karet er bed-man.

YANN.

Deveriou ar c'hristen

Fall bras eo adkoueza er pec'hed

Sellomp ervat petra eo koueza er pec'hed. Pec'hi evit ar wech kenta a zo beza fall e kenver hor C'hrouer, divat e-kenver Doue. Hogen pec'hi c'hoaz goude ma vezer bet pardonet a zo beza kalz falloch, ober da Zoue gwasoc'h dismegans, kaout evitan kalz muioc'h a zispri. P'eo gwir ez ankounac haer e holl c'hrasou hag en em daoler adarre a du gant Lusifer, evit brezelli a-nevez enep d'hon Tad a zo en Nenv.

Eur pecher adkouezet, adfeilhet, en deus ouspenn lec'h da grena. Pa hoc'h eus torret unan eus ho tiouar, eme sant Aosten, ha m'eo bet dresset gant ar medisin, mar degouez d'oc'h he zerri a-nevez, e vo kalz diaesoc'h da zressa en dro se. Ha seul liesoc'h e zorrot, seul startoc'h e vo he farea.

Pa reomp eur pec'hed, izili hon ene a zo evel torret, evel dilec'hiet. Sakramant ar Binijenn o laka pare, o laka en o lec'h evel diagent. Met mar adfeilhomp diou, teir, peder gwech, an diouganour Jeremias a lavar e vo gwall ziaes gwellaat ar pezh a zo torret en hon ene. Rak pellaat a reomp diouz Doue muioc'h-mui. Ha d'erc'hel a ray Doue da rei d'imp grasou ker bras all evit hon dizrei outan! A dra sur, hor stad a zo gwasoc'h eget araok.

* * *

A hend-all, ar maro a c'hall dont d'hor skei pa sonjomp an nebeuta. Ha mar bezomp er stad a bec'hed, petra a zegouezo ganimp? Da belec'h ez aimp ni? D'an ifern.

Fall bras eo d'imp eta, ouspenn fall zoken adkoueza; da lavarout eo, koueza a-nevez er pec'hed, goude m'eo bet pardonet d'imp.

Ha sonjet hon eus biskoaz ervat peger bras droug eo adkoueza er pec'hed, goude m'hon eus bet an absolvenn anezan? Ha kredet hon eus e toug d'eur gwall varo? Aze koulskoude e kas ac'hanomp, dre ma teu d'imp grasou e-leiz hep ma prizomp tenna vad anezo.

Hag ar sakramanchou a dlefe servij d'imp evit en em savetei ne servijont nemet da goll ac'hanomp, dre m'o implijont fall. An dra-se a ra da Sant Paol lavarout eo gwall ziaes d'eur pec'her evel-se distrei ervat ouz an Aotrou Doue.

Mar ez eus eun dra bennak hag a c'halo teneraat hor c'halon, eo hep arvar ebet ar sonj eus ar maro, pe eus ar varn, pe eus an ifern.

An holl sonjou santel-se a zeu en hor spered a berz Doue. Met an holl sonjou se a vougomp en hor c'halon, p'en em daolomp evel diagent d'ar pec'hed. Pellaat a reomp diouz gras an Aotrou Doue.

Goude m'hon eus lakaet reiz hor c'houstians dre eur gofesion vat, mar deuomp da goueza a-nevez er pec'hed, e renomp eur vuhez kablus evit echui en eur gwall varo. Rak, pa hon eus pec'het c'hoaz en desped d'ar pez a oa mat d'hor mirout a bec hi, petra ' vo breman evit hon derc'hel? Petra a c'hall a-walc'h hor gounit? Ar Sakramanchou? O resev a raimp hep tenna vad anezo. Grasou Doue? Derc'hel a raimp penn d'ezo gant aheurtamant. Karantez Jezuz-Krist? Trei a reomp kein d'ezan evit mont c'hoaz d'ar pec'hed, goude m'hon eus e resevet en hon ene ouz an daol santel. Hor c'halon zoken a servij d'imp da galvar evit staga Jezuz a-nevez ouz ar groaz.

(Adskrivet gant Gournadec'h.)

Taolit evez mat

«LA VIE CHRÉTIENNE», ar gelaouenn c'hallek moulet skoaz-ha-skoaz gant *Ar Vuhez Kristen*. ne vezo ket moulet ken.

Ar re a reseve «LA VIE CHRÉTIENNE» hag o defe c'hoant reseo en he lec'h *Ar Vuhez Kristen* a zo pedet da skriva d'eomp.

Skriva da: Monsieur le Directeur de «Ar Vuhez Kristen», Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère).

Er miz a zeu...

Istor torch-skudellou Seza Kouignplat a vo kontet d'eoc'h gant Petromik.

Pedenn d'ar Werc'hez evit ar Vro

(Ton : O Sainte Anne, o Marie!)

*O Mari, o mamm vat,
Sellit piç ouz bor bro:
Truezus eo he stad,
Deut buan war he vro.*

N'eus ket eur vro, mamm benniget,
Karet ganeoc'h 'vel hon hini;
A gement-se hon eus gwelet,
Ha gwelet skler an testeni:

Pet ha pet gwech, mamm druezus,
Oc'h diskennet war he douar,
Gant ho kalloud madelezus,
D'he diframma diouz ar glac'har!

Gwasoc'h hirio eget gwechall,
Hor bro a-gouez dindan ar groaz:
Da chadenna ijin ar fall,
O mamm nerzus, diskennit c'hoaz.

N'omp ken, siouaz! nemet pec'hed,
Met rannet eo hor c'halonou:
Setu perak, o mamm garet,
Digemerit hor goulennou:

O! ni ho ped, mamm binvidik,
Rentit d'hor bro frankiz wirion,
Rentit d'hor bro feiz birvidik
Ha peoc'h Doue da bep kalon.

Neuze avat, o mamm dener,
Gant levenez ni a gano:
Mil bennoz deoc'h e pep amzer,
Meuleudi d'eoc'h ha d'ho hano.

SEB.

LENNIT PIZ KEMENT-MAN

Priz ar VUHEZ KRISTEN
a vezo breman :

Koumanant ordinal : **15** lur

Koumanant a enor :

(Gant perz e 365 oferenn)

20 lur

DA LENN GANT EVEZ!

An taol-man, eo p'ossubl e vije eur fazi bennak
evit ar pezh a sell ouz an adressou.

Ho pedi a reomp, ma vez ret, da skriva d'eomp
hep dale.